

ZON TAOLEN AR IAOUANKIS

Composet war sujet

Eur Zoudard hag he Vestres

Moïzes ha Jeremi, David ha Salamon
Mercur hag Appollon, Saturn ha Cupidon,
Me a c'houlenn d'am zicour puissanço ann douar
Pharamon, Charlemang, Napoleon ha Cesar,
Neptune ha Jupiter, Annibal ha Brutus,
ker Rom a oa bet fonbet gant ar prins Rumulus,
Goude gout talanchou roue ar profetet
Me a c'houlenn d'am zicour ann oll rouanet;

Sibel ha Cléopart, Nitrocrisa ha Junon,
C'houi peuz bet epad cant vloaz en Egyp ho tron,
Pa oc'h peder aouannes ha mammou ann amour.
Divoar benn ma daoulin, me a c'houlenn zicour,
Me a c'houlenn o puissans da c'hallout composi
Ar pez zo em zantimant hag ive em fantasi
Ha me brezanto dec'h « Taolen ar iouankis »,
Pa portret Venus barz creiz he c'honestiz,

Bars ar guer capital deuz rouantelez Franc
Chilaouit ta, tud yaouanq, mont a ran da gommans
Me ma laket ma speret de garout eur plac'h yaouanq
Hi he deuz laket hanon bars ar brassan tourmant.
Hi en deuz laket anon bars er brassan souffrans,
Hag ar maleur pen da ben zo ive eneb ve chans,
Kontad ara bet ann enor da veiet eu. sort'neuriz
E voa ebars plasenn ar Victoar er ger vras Paris.

Heno me hi remerkis, leun a dristidiguez,
En creiz eur bobl enorm, hi voa eno esclavez
O velet anezi ken grasiuz hag he speret ocupet
Me zirijas ma fajou vit monet d'he c'havet
— Bonjour d'ec'h plac'h iaouanc, ma ve din permetet
Ma ne pe disprizans vit dont guani da briet,
Rag herve guelet ho costum me zo deut da gredi
Hoc'h natif deus a Noriant pe deus a Bontivi

— Me o merci, den iaouanc, demeus ho compliment
Me n'hon na deuz Pontivi, na deuz a Noriant;
Mes ine a c'houlenn diganec'h, mar be ho madelez,
Da donnet assemblez guenin da basseal an devez,
Rag me n'eus ket goel bel zo ha ma hon arruet
Muioc'h a plijadur a me, ma vefen konduet
Ha va bonheur a reposo barz creiz va dirizou,
Aman me oa ma unan ha brema ni vezo

— Ha ma avantur ne ket fal, vit ann devez hirie.
Pedi rann ann Esperans evit ma c'honsolo
Kemeromp eur gariolen ha demp-ni da bourmen.
Da guemer ann er war ar maez pez a rei vad d'hon pen
Kals a c'hoant ma da c'houd ar pez na ouient Ket
Hac en ebarz eur spennen ar format eur boket
Rac owelet anezi ho ton em c'hompagnonez:
Ann dra ze dime re da gredi, ne oa ket eur seurez

Mes pec'hed eo laret netra divoar ben den'bet;
Bremen c'houlennan iskus deuz ar pez meus laret
Mez gout a ret, ar merc'h coant, zo leun a garantez,
Kis ar merlg deus au dir hag ar spoen euz ar goez

Loscomb breman, kement-se vit goude hag en he guir
E meus ar memeuz zantimant hag ar memeus desir:
Tremen refom hom amzer hep tourmant na chagrin
A demp ni da goad Bourlong dre eur sulvez vintin.

— Me a meus confiansvras ebars ar Vretonet,
A me ho heuillo enn kement plas ma lerefet,
Ebars eun den deuz va bro me laco ma fiarz.
Pa c'homp n'em gaed hon daou, bars e capital Franz
Na vanc mert caet courac'h da soign ho hiritaj
Ha c'hui pezo, goude ze, ar bonheur vit partaj
Bars e Paris ni dremeno hom oll blijaduriou,
A me bourmeno bars ker dre drouz ar muz kou.

— Karsa eta, plac'h iaouank, ho komzo zo leal,
C'hui ar galiteo vanq vit dont da gozeal
Mes te mar d'eo guir c'heuz hennon braz confianz,
Me na c'houlennin netra mert ar preteranz,
Ha me vefac'h adel lin keit a vin er servich,
Berroc'h kaffen ann amzer barz he ruiou Paris
A ma c'haffen d'ar brezel c'hui bedo evit hon
Hon Doue a visericord vit dont d'am froteji

Mes ann noab oa ken pur, ne voa ket eun nuagen.
Hag an eol ken brillant ha dol e sclerijen;
Ar fleur, ar lapousset, ha mister a c'hoajou.
Ar murmur deus an douar o redeg bars ar gwazion
Ne ket ta me o ped, da droubli o spered
Pa n'eus Doue acordet, eur bonheur desiret,
Dre ar glis euz ar mintin a gan ar lapousset,
Kis ar barados terrest et commansamant ar bed,

Ho Roue deus ar firmamant, Gouarnel an douars,
C'hui ar gommant ma bonheur pelleit diouzin glac'h
Rak me so brema en lec'h vit formi eun histoar,
Me c'houl furnez gant Salomon ha kouraj gant Cesar,
Vit ma c'hallin disklerian bue va iouankis,
Ar pez zo gueni erruet bars er guer Paris;
Bremen eta plac'h yaouanq, arretomp aman.
Hag an deillo deus ar goen deuo domp dizheoilan,

Mes allas! ar plijadur da dont hon daou assemblez,
Me gred e man o prepari eun dristidiguez
Rag me e meus evidoc'h eur guir garantez,
Me o ped 'ta, goude-se da gaout ouzin truez.
Rag c'hui a den d'ann dilezet ker... skler,
Bel... bras soldard, pad eun neubed amzer
Me zo c'hoas dindan na drapo, o c'heil va rejimant
Me meus ket va liberte, truez ete plac'h iaouank.

Neuze e kemeras va dorn, o kommans da oelan,
Hag a respontaz ac hanon gant eur voes a grean:
— Possubl vo, ta, den iaouanq, e vefen ken krue,
Ma vefen quet recompanset gant Doue eternal,
Me zezir kaout eun den hag a garo ac hanon;
Hennes nevo va fidelite e kis ma verito,
Hag evit gortos an deiz, ma po ho liberte,
Ni vo bed ho pourmen an eil gant eguille.

Me o ped ta plac'h iauanq, assuret ho comzo.
Rag bars jardin an amour c'heuz konduet ac'hanon ;
Mes neket alvoac'h chom aman da genton merveillo
Poen eo dimp mont d'an oferen-bred, me o konduo
Eno dirag ar Barner, ni rañ ho fromesso,
Da zouguen fidelite beteg dor ar maro ;
Neuze e oamp antreet bars er guenta illis
A gand eun devosion vras e klevis an offis,

Dre musik an aogrou, eur voes selestiel
Ni a boa gret ho fromesseo dirag ann Aviel.
Pa oa achu an ofern bred me a oa deut er mez
En toul dor a c'hreis deiz. e oan chomet d'he gortoz
Ha pa ma guelec anezi o ton emez an iliz
E oa ken kær a a ken koan hag eur fleurdilis
He daoulagad oa kent brillant hag e bisaj a fleur.
Da vont bars tal e c'hichen vidon devez bonheur !

Goulenn a ran breman d'an oll batriarchet
Da rei eloquans d'am moes ha kourach d'am speret
Rag me a zeu da saludi prinses an oll verc'het :
Hi zo brillantoc'h vit an eol, kaeroc'h vit ar steret.
A c'houi doctoret an douar, prestat din ho talant,
Me a c'houlenn ho sicour Roue ar firmamant
Ha d'ann eur da greiz deiz me ho saludo
Pa unisso an «Angelus» gant trouz ar c'hanono.

Bonjour d'ech Dimezel, nijet deus an envou.
Doctrinez var an douar ha prinsez ar fleurjou,
C'houi eo ann agreaplan plac'h zo krouet gant Doue
Me n'on ket dign da prezanti dirag ho majeste :
C'houi gant ho er grasinz'hag ho kalon loyal,
Glefe bean saludot gant a brinset loyal,
M'es pa m'eus bet an hardiez d'a zonet d'ho cavet
Me vo ar malhurusa den ma na ven ket estimet

— Na ne ket red dec'h caet an talanchou-se
Vit dont da saludi eur plac'h a guis dime,
Rag c'houi a zo destinet d'ar brassa obéissans
A prest da skuilla ho coad vit rouantelez Franz ;
Ebars creiz ar c'hombajo, pa vo criet victoar !
Hen a laca da grena anz env hag an douar,
Rag eur zoudart vaillant vit rei gloar d'he drapo,
A ankoa tad a mam vit monet d'ar maro.

— Vit eur plac'h a galité, c'hui noc'h ket difcil,
Ken mo bet ho teziriou me na vin ket trankil ;
Ha pa ve red din avanturi daouzec goec'h va buez
Vit kaet an assurans demeus ho karantez,
Nag ive combati enep cant va unan
Kement-ze zo netra vidon m'ar o lakfen content ;
Rac guelloc'h ve din bean maro, a guanec'h caret,
Kent vit beva var an douar ma na ven ket estimet.

Doussa tra zo var ar bed ez eo ar garantez
Pa ve daou den hag en em gar ann eil hag eguile,
Faguen everus vefe an dud ma carfen n'em gared,
Ne ve guelec var ann douar netra mert mignonet,
Hag an den ken unisset, pa ve erru koz,
N'em gafo eurussoc'h da antren er baradoz ;
Mes maroc'h va servijer me zo ive ho mestrez,
He c'ham da bardon Zant-Cloud, da dremen an devez

— Charmet hon, plac'h iauanq, huel ea ho fidelité
Mez guelec euz dol d'ar mintin ha glao d'an abarde,
Hhg ar merc'hed zo memez tra gant ho fromesseo,
Ar pezh e vet laret dec'h ve disclaret hiriu,

Kouscoude c'heus klevet laret, ha kement-se zo gui
Guelloc'h eo teod eun den mud vit eun teod re hir
Mes huellet ar volonte vad deuz ho santimancho
Ken a vin var douar, c'hui ann hini em c'haro

Neuze e partiam hon daou kassel a kassel
Vit kemer au hant ouarn entre Paris a Versail
Ebars ar guer a Sant Cloud, eno voamp diskennet,
Dre ur zulfes a c'haeran goude an ofern bred,
Ann amzer a voa scler an eol a voa brillant
A trao an douar voa zeder dindan ar fiment,
Ar rossignolet a gane bars au huelduer,
Hag ar c'halono oa joaüs bars er memeus amzer.

Ar musico royal a soné bars er palez ;
Me a c'houlenn ho santimant breman ta va mestrez
Kourac'h eta plac'h iauanc din eo ar victoar,
Biquen ne vint separet keit e vin var an douar
C'houi c'heus eur guir momen bars creis ho calon
Vit renta din an dour a gonsolasion
Ha pa meuz cavet a feunteun dimeuz ho carantez
Me na c'houlenn ken netra nemert ho polontez

Na peuz met lakat ho speret da regli ho santimant,
Goude carout ha bean karet c'hoas noc'h ket content
Ni meum gret or fromessou laket Doue da dest,
Hag or planeden var ar bet visido ar rest,
Ia, deuz greiz va c'halon, me hel da gombatti,
Ha prest da skuilla va goad assemblez gant o c'hini
Mes ar momet zo erru d'entreal en Paris,
Rog a vo zerred an or gant an dud a bolis

— Setu aman. va mestrez vidoc'h eun di lijans,
Pe eur c'hourier reserve mar he ho preferans,
Pe demp-ni d'ober om choas barz touez ar haroso.
A ni a bo eur c'hocher, hag hon c'honduo,
Ha me a mo c'has eun heur rog don d'ho tilezel,
Kontampli va plijdanr bars etal ho kichen,
Interroji, ha douster ha zellou,
Kaeroc'h vit ar sclerijen deuz ar flammou ar go'on

Agreaploc'h vit ar fleurs, doussoc'h vir ar zei,
Impossibl ez eo d'eun den chom hep harout anei
Hi dolou sclerijen dre lec'h a dremeno,
Hag ann dud var e fasaj casi a daoulinoc'
He furnes hag o speret a c'heunil e fuissans,
Na gredan ket ma e fars bars Rouantelez Frans
A pevar c'horn an Univers hi dol ar sclerijen,
Kis an col o sortial deuz daeg ar goummoulen.

Hi a deuz ar galite a vanefe d'eur brinçes,
Ne vank dei met eur gurunen vit bean rouanez :
Pe gant eur Mest Souveren ma va dija barnet,
Hi ve laquet Ja rouanez var an oll Ellezet,
Setu aze tud iauanc portret ar Venus,
Ar puissanso deuz ar bed n'int qet vit hi zreus ;
Neuze oamp an re'et triomphant en Paris
Pa oa formet gan nimp «Tolen ar iauankis.

Ha contentoc'h omp da veza var an douar,
Vid an oll ellez eurussoc'h bars puissans ar gloar
He dorn barz va hini ; he hano zo gravet,
Bars ar fons euz va c'halon keid vin var ar bed,
Hi scuill bars va c'halon an oll plijadurio,
Guelec ar c'hoars agreabl var e muzello,
Oh ! Divinite plijatur, joa enn envou
Chui rejouis ann elez gant ho fayeurjou.

C'houi sperejou koachet hanvet ar misterio,
Pa separin deuz va mestrez, consolet ac'hanon,
Rac ma deu da jonj d'in d'ar separation,
Me zant ann toliou lans oc'h antren em c'halon :
He fresans hag he imaj gret evit tenti,
Lakat oll dud ar bed da zont d'hi adori :
Netra nemet he skeut, pa ha var an dachen,
Zo kareoc'h vit an dour pa gouez deuz eur Blomen.

— Breman eo va zro, d'en iaouanc, ta arretet,
Ma vije laret ze dec'h, choui vije fachet :
Dre gonsekans, me o reglet ho comzo,
Me gred oc'h clasc tu d'ober goab ac'hanon.
Car me n'on met eur baizantes hep mado :
Den na deui da fleuria ma bez pa vin maro !
Mant ma zud, da guenta, losket enn abandon
Den ebet n'euz kemeret zoursi ac'hanon

Ga meus vel eur gonkries. Gourin cuiteet,
Lec'h beau caret hon bet bepred repousset ;
Ma meus bet cuiteet ken iaouanc se va bro :
Va liberte n'euz koustet din meur a daëlou,
Mes pa hoc'h an den kenta ocup ma malheur,
Carfen bean princes vit ober ho bonheur,
Ma ve red dec'h combatti ho adversourien,
C'houi po eur gamaradez e tal ho kichen.

— Merci ta plac'h iaouanc, deus ho fidelite,
C'houi zo dign da vean mestrez var hon-me,
Netra nemet clevet hanoc'h o coseal,
A ra din gout peuz studiet levriou moral ;
Doue neur ober diouzimp paisantel,
Neuz rentet dimp bepred kalon d'em em garet,
Hag oll a c'hallomp caet kement a furnez
Evel ar c'henta prins deuz ar rouantelez.

Scoet peuz gant ho comzo var dor va c'halon ;
En guis ar profet Israel c'houi ra ho sermon,
C'houi vo recompanset deus ar pez verited.
Na gollet ket ho poan ho tont d'am darempredet ;
Pa oc'h deut d'am adori, c'houi po ma c'halon,
Doue ha da disquen varn'omp he benedicsion,
Ha d'hon kas d'ar barados goude hon maro,
Setu den iaouanc, ar pez garfen a vezo,

— N'euze ta plac'h iaouanc, pa vefomd desedet.
A unisfomp assemblez hor c'horf hag hor speret :
Annonset ez eo gant Doue d'omp ineo,
C'homp laket assambles tre beket ar maro
Hon daou El mad hon deus ac'hanomp saludet,
Laret deus da zoue penos omp unisset :
Meum ket nemet deus Elez fall da n'em difen,
Ened da gant eler mont er lesen gristen.

— Trawoalc'h eo kement se vit an devez erio
Ho servijerez a lar d'ec'h ken a vezo,
Gant eun desir d'ho coelet a lar dec'h bonsoar ;
Rac c'hui ma frotejo beman var an douar,
Bars ru Sant-Honore, en numero pemsec,
Lavarfet ma c'hano a vefe respontez ;
A c'han-me brema, den yaouanc do tilesel
Zonet eo anter-nos en illis Madalen.

— Lesomp anter-nos da zon, zaludomp an-de,
N'om ket prest da n'eum veled eur chang a ve ze,
Rag c'hui zo vel eur fleuren var bord an enno,
Ve dastumet buon dre ma plij d'ar zello,
C'hui zo vel eur boqvet ros e creis ar joaio,
Prestic gant unan benag vo joguet e zelliou,
Vit clevit kement se ne ket red dec'h fachan,
Me a lavar se dec'h vit ho avertissan.

Zaillet ra ma c'halon ho clevet ho comzo,
Vel ra ar bandulen pa verc a momencho,
Nag a vefen couezet bars ar brassan danjer,
Me brononso bepred gano va servijer,
A Doue gasso ma mouez betec o calon,
C'hui n'eun denno hanon deus an abandon.
A bel vel deus a dost me sonjo enn ennoc'h,
Evit ho tilesel, mervel refen kentoc'h

Mar geo sortiet se deus kreis ho calon,
C'han da guitad ho torn ganteur gonfians don ;
Ken a vo a laran dec'h breman, plac'h iaouanc,
Gras dec'h da gonservi ar memeuz zantimant :
Zur on d'ho velet c'hoas dirag ma daoulagat,
Evel hoc'h er momet man pa han d'ho cuitad,
Ken a vo ta laran dec'h, ma mestres koant.
Ra va enn ho kalon ar memez zantimant

— Oh ! me a souhet dec'h kement a zouetet din,
A me o ped da sonjati bepred diouzin,
Larout ran dec'h bonsoar dre ar memeus diskour,
Ken a vo, deut an deiz, da laret dec'h bonjour,
Enn deiz bras ze ma c'halon vo er joaüsted
Breman oh ma Doue a hon bras kontristed
Ken a vo ta gant va oll bolonte vad
A hon forcet koulskoude da zont d'ho kuitad.

— Pa devoa ma mestres dilezet ac'hanon,
Me a voa c'hoas em flas o sec'han va daelou ;
A ben eur momet goude pa zavis va fen,
Me a remerkas diou goulm ebars en noabren,
Ann eil diouz eben abellae buon,
Separet a vont, Jesus pebeuz vision !
Ze voa va fleneden lennet din gant Doue,
Vit kreskin va souffrans a zo bet kri goude.

Dre sklerijen loar ha flambeau ar steret,
A dre urzo Doue me a oa separet,
Lavaret mam ken-a-vo ann eil d'eguille,
Ar zulvez memorat passeaz an noz-se ;
Breman ma en servij ar brinzez Dardenel,
Evit difen anezi me zo prest pa vervel ;
Ma vije laket voar e fenn eur gurunen,
A lakafe an eol da goll he sclerijen.

Va mestres zo caeroc'h, pa ve voar an dachen,
Vit princes Mezalin, rouanez ar Romen,
Kouscoude a recev gand gras a gant furnez,
Daouzec a tri-uguent prins bars porz he fallez ;
Mes oll joaio ar bed na nint met jalousi.
Ha me n'hon vit Karout met an ini plij din,
Pa guitaen ma c'hasern vit monet d'a bourmen,
Me vijen em flijadur met en tal e kichen.

Goude bean premetet din caet vertu
Na vin me quiet contant nemet ba vin achu,
Ken vit arri er bud meus laquet em speret,
Pa ma vin var an douar repos na mo ket ;
Piou alfe laret, he zorn var e gonsians ?
Me a finisso ar pez a hon o commans !
Kals a valeuriou a arri bars ar bed man,
A den bet na voar ar pez arrio gant-an.

Ebars er bed-man na neuz nemet treitoureuz
En kavel an inosant ep ken unan a furnez,
Divoalet tub iaouanc da droubli ho repoz
Ha donnet da clask ar mintin pa ve noz,
Peuz met sevel ho taoulagad var zu ann evou
Ann oll goumoulenno dremen na doug ket ar fleuriou
Hag ar bromesseou groet heb bean d'alc'het,
Eo ar brassan pec'het zo enn touez ar merc'het.

Bars eur jardin, ornet gant ar bravoan fleurieu,
Lec'h ma ve er mintin ar gliz var an dellio,
A bourmen eur plac'h iaouanc n'eur gana eur houblet
He mouez a n'eum vesk gant hini all lapousset,
Prestik e zen d'an natur harset gant ar musik,
Mes ar plijadur zo ber hag joa rapid,
Ha n'eur lako ma mestres da skuilla ma daëlo,
Boket an amitie nevo ken a zeillo.

Me o ped, plac'h iaouanc zec'het ho taoulagad
Ma peuz va dilezet eo dre volonte vad,
Hoc'h oll daëlo n'int nemet evit ober feson
Ha vit kusan traison zo barz n'ho kalon ;
Na gleeur n'em fiout barz n'ho promesseo
Ken a ver unisset dirag an autoriteo,
Kouskoude enn-hoc'h o ma laket ma fians
A tourman a red din evit ma rekompans

— Dont a red ta den iaouanc d'am akusin,
Ha da clask he welan, ober poan vras din,
Nag a vefen treitoureuz vel ma peuz laret
Noc'h ket na barner eun de na juge var ar bed,
Ann injuriou red din zo fall dirag Doue,
Rag peb hini a zo mestr da heuil he bolonte ;
Gras dec'h da gaout e lec'h all ho polantez
A da gaout viti ar memez karantez

Ket arog ta plac'h iaouanc moc'h dizantimantet,
Bet eo an teodou-fal o prezec voar va zujet ;
Oh Doue ! roet din ar brassan faveuriou
Evit ober eur c'hompliment d'ar goel deodou ;
Ann teodou fall zo kaus d'an oll brezellou
Petra zistrug an dud hag a zec'h ar c'herrfiou ;
Int o den ho c'haliteo mad d'an dud fur
Hag e plas ar bonheur lak an displijadur.

Petra zervic'h din dikrial an dud vil se
Fallan tra c'hallomp laret so gret evite
Travalac'h a ve var sujet ar gouel deodou :
Peb lec'h var an douar glevet ho c'homzou
Bemdez ve eun exempl dirag ho daoulagad,
Ar re zileo gant e zo ive ken coupabl ;
Vitic'h hu plac'h yaouanq, a laran kement-se
Rac c'houi so bet ive an conferans gant-he.

— Me o ped, den yaouanq laret kenavo d'ho mestres
Homan eo an diveza goech hom assembles
Goude bean bet daou vla en em adori
A lakafomp kement all vit n'em insulti
Tit ampech kement se me lac ma zantimant,
Da vont da achui va bue en eur gouant,
Var kement-se, den yaouanq a tean do dilezan,
En em gonsolet, me a rei ma finijan.

— Possubl eo plac'h iaouanc a zilesfec'h hanon
Refec'h ho interramant arog bean maro
Pa vo kanet var ho peuz ar c'hantico latin
A vefe divoet da gaout nec'h a chagrin ;
Oh ! me o ped ta da drei ho keint da gouant
kapab a hoc'h da vont enep d'ho zantiman
Noc'h ket evit compren a guement hirvoudou
Zo en calon ar merc'het barz ar c'hoenchou.

Awalc'h ! rac da anter-nos, na da greiz-de
Na velomp unisset ann eil gant egulie,
Goel a reomp voar an douar cals a verc'het
Bars an houancho-ze a zo en em vouet
Pa deuz groet ho sermant evit bean seurez
Lec'h bean onn kuset a garfen bean er mez
Ganec'h plac'h iaouanc, a c'hoarve kement-se
Noc'h ket vit lacat gaou lec'h man ar guirione.

— Na deut ket ta den iaouanc, da goll esperans,
Marteze gant eun all c'houi a po muioc'h a chans,
En ker Paris, da c'hoas, merc'het c'hui a gavo
Po me laret merci goude ho c'houlenn ;
Neuze gant ar Brovidans veet recompanset
Nag a be collet o poan d'em darempredet ;
Pedet an oll zent da zoulaji ho mizer,
Rak ar paour neuz netra met n'eur laret he bater,

— Ked arog ta plac'h iaouanc ket arog plac'h ingrat
Ober a red goab hanon dirag ma daoulagad,
Kement se zo rein d'eun den re a souffrans
Tec'hel euz va mestrez a lac'h va esperans
Setu me evel eun den condaonet d'ar maro
Mest ar varn general c'hui em ressussito ;
Mes nag a pefe eur galon caletoc'h vit eur min,
Na fot ken vel eur soudart da-ober c'houarzin

— Ket arog den iaouanc ma oc'h disgonsolet.
Kouskoude a wejo gaver ar peuz ve collet,
Pa deu e kreiz ar gouan ann eol da don an
Voar lakat ar lapousset da dont da ganon
Kalon an dristidiguez gleve bean memez tra,
Goude dristidiguez gleve dont ar joa,
Mes d'hon amitie zo fin an disfians a gommans,
Laret ken-a-vo ta neuz ken a esperans.

— Marteze ta plac'h iaouanc, eo guir kement-ser
Laret a ret eta din ar guir guirione
Kouskoude na gredan ket herve ma santimant,
Bars en calon eun El ve format eur serpan,
Lavaret e voa din bars ar bonaventur
Penos me a va mestrez mijem plijadur,
Ha ma mam bars ho calon remorz ar gonziens,
C'han da c'houl ganec'h an diveza esperans

— Ma ve red nem separi ann eil deus eguile,
Hallet finis va bue gant eun tol cleve
Setu me d'an daoulin dirazoc'h prosternet,
Rei din ho benediction roc cuitad ar bed.
Ha mar zo n'ho calon netra nemet malis,
C'hont ha doler eur boureo deus ho iaouankis
Mes ar peuz c'houlant diganec'h em zestamant,
Eo douglet eun habit du em interramant,

Breman welan, den iaouanc hoc'h eun den a gouraj,
Miret ret eur plac'hic'h da vont d'he ermitaj,
Mes lec'h bean ped ma vue eun devalijen,
Gant ma zervicher me vo pourmenet voar ann dachen
Me douo ma ve red dirag ar c'hucifi
Ma me ket anoc'h me chomo hep hini
Brema a meum eur vuez nevez da gommans,
Zavet ta va servijer achu eo ho souffrans.

Voa ket red dec'h vit se, caout ambission
Ne voa met eur gouent o sisput ma c'halon,
A pa hoc'h bet victorius voar ma zilvidiguez
Ne c'houlant ken netra nemet ar priadelez,
Neuze velomp assemblez beteg ar maro
Goude bars ar memez bez hefomp da repos,
Hag evit gortos an deiz euz ar varn diveza
Gras dimp da n'em voelet bars draonien Joseph.

— Neuze ta va mestrez demb hon daou d'an illiz
Hag a finisso ma zon noar ma iaouankis.
Mar oc'h e clasq piou a neuz komposez ar zon
Man breman forestour bars koad Toul a lazon,
Pa neuz hi komposez a voa soudart iaouanc,
Er grenadourien Francs e divoas regreant
Eur zon n'eo ket goel difficil da komposez.
Peb ve arai gant eun den ve ezet da gontan.